

CANTIC

ITRON-VARIA LANN-RIOT

Ton : *Ni hod salud stereden vor.*

DISKAN

Henor da Ver'hez Lann-Riot,
A zo sicour ar martolot,
Esperans ar mamou christen,
Ha souten al labourerien.

E Moëlan, e ribl ar mor,
Eur chapelic a zo digor,
Hag enn hi Guere'hez Lann-Riot,
Mari guir vam ar martolot.

O Mari, pa c'houezo an ael,
Hema zonjo en ho chapel,
Euz ho chapel, mirit bepred,
He lestric paour na ve ffastret !

E Lann-Riot tal ar mesiou,
E creiz ar guez hag ho bleunioù,
Eur chapelic a bign en er,
Evit nerza al labourer.

Ma skuiz hema gant he labour,
O Mari, roit prim ho sikour,
Ha pa bedo en ho chapel,
Ra zanto ractal ho skoazel !

An ebestel, var ar mor glaz,
Guecha'! ivez a besketas ;
Mez pesk ne deu en ho rouejo,
Ken a goms Jesus an autrou.



O Mari, c'houi bedo Jesus,
Ma vo ouzomp trugarezus ;
Ha ma lâro vid-omp ar ger
A ro chans vad d'ar pesketer !

An oll her goar, ar c'hreunen ed
En douar guechou a ve collet :
Mez ma zeu Doue da barlant
E lec'h unan ve cavet cant.

C'houi c'houlenno, Guerc'hez Vari,
Ma brofito hor parkou ni,
M'hor bezo cant e lec'h unan,
Da nebeuta, digoll hor poan !

Ho mab Jesus en deuz prijet,
Gant ho lez pur, beza maget ;
Peb mam ivez en ho chapel,
A gavo lez vit he bugel.

Penez sonjal en ho Mabie
Ha dilezel ar bugelic,
A varvo sur, var he barlen
Ma na roit d'he vam he goulen.

Labourer douar, har martolot
A zeui a bell da Lann-Riot,
A ziredo evit pedi
A ziredo evit meuli.

Mez evidomp ni Molanis,
Mar hon eus savet hoc'h ilis,
Bezit mui c'hoas ar Verc'hez ker
Hon diouallo a bep danjer.

CANTIC ALL

Ton : *Kelven*

DISKAN

Santez Mari Mam Doue, patronez Lann Riot,
Clevit mouez al labourer, peden ar martolot ;
Pa skuisimp en hon labour, pa grenimp var ar meur
Sellit ouzomp a druez, roit d'eomp bepred sicour.

Hon tadou koz tud a feiz, tud a religion,
Var bord ar mor e Molan 'vit ho devotion,
Ho devoa eur chapelic leshanvet Lann-Riot ;
Lec'h ma pede calounee couer har martolot.

Eun amzer drist a zeuas, an dud vad oue chasheet :
Dre urs tud fall ha difeiz, ar chapel oue pilet ;
Mes d'hor Mam ato fidel, ni zeue dar plas santel
Dirag imach Lann-Riot da c'houlen he skoazel.

Canomp brema. christenien, canomp gant joausdet,
Canomp gloar ha meuleudi d'ar Verc'hez venniget ;
Chetu savet a neve chapelic Lann-Riot ;
Pebez consolation evit ar martolot !

Ma'n em gavit var ar mor e danjer ho puez,
Galvit Mari gant fisians ; hi eo ho rouanez.
Lavarit a greiz calon ! O GUERC'HEZ LANN RIOT !
Ractal Mari zicouro ar paourkez martolot.

Mad evit an dud a vor, Mari zo mad d'an oll,
N'e deus nemet eun desir, ne zafo den da goll ;
Pa vec'h eta trubuillet, gan ar c'hlenvet goasket,
Pedit devot ar Verc'hez, sur e vec'h confortet.

An hini e deus maget hor Zalver gant he lez,
Evidoc'h, mamou christen, zo leun a vadelez,
Mar vank d'eoc'h magadurez vit souten ho pugel,
Deut gant ar brassa fisians da bedi d'he chapel.

Bishoas, eme Sant-Bernard, bi-kwas ne oue clevel :
Eur goulen gret da Vari a vet bet refuset :
Ar verc'hez a zo hirio ker galloudec ha dec'h,
Hag en despet d'an amzer ne ket berreet he brec'h.

A Verc'hez dinam a Lourd e menez Pyrené,
A ziskonez he zrugarez de viraclou-bemde ;
Ar miraclou a velomp e Lourd er Pyrene,
Petra viro n'ho guelimp e Lann Riot ive ?

Evel ar bardonerien a ia leun a fisians
Da glask buez hac iec'hed dar c'horn-se euz ar Frans,
Ni a zui d'hor chapelic gant eur fisians neve,
Da laret hon oll bouanion a gorf hag a ene.

A vechou eur medesin kaer vo fysiout en han,
Ne allo gant he skiant hor zicour pa vimp elan ;
Eun hor poanion, christenien, ni'n euz hen amprouet,
Itron Varia Lann Riot hor soulajo bepred.

Pet soudart da Lann Riot, kent PARTIAL GOUESLET
Zo bet, bennoz da Vari, er brezel diouallet !
E creiz danjeriou ar bed, pet e deuz conservet !
Bursudou a vadelez heb niver e deuz gret.

Pebez avantach eta evidomp, Molanis,
Hon deuz oll en em glevel da zével eun ilis
En honor da vam Jesus rouanez an elet
Prest kaer ato d'hor sicour kerkent ma vo pedel,

Itron-Varia Lann-Riot, refuj ar bec'herien,
Taulit eur zel a druez var ar bardonerien,
A re zo deut hi io, ar re a zeui goude,
Ma'zaint d'an env d'ho meuli hed an eternite.